

**Diskan :**

**Itron Varia gwerc'hez Gerlean,  
Hon skoazellit betek ar fin ;  
D'ho pugale roit ho pennozh  
Ma c'hellimp mont d'ar Baradoz.**

1 - Kristenien Vael, ho tud gwechall,  
Tud a feiz greñv ha tud divrall,  
A savas ouzh troad ar menez  
Ur chapel goant da Vamm Doue.

*Les chrétiens de Maël, vos ouailles autrefois,  
Gens à la foi forte et intrépide,  
Bâtirent au pied de la colline  
Une jolie chapelle à la Mère de Dieu.*

2 - Ha goude-se kristenien Vael  
'Zeue da bediñ d'ho chapel  
Da c'houlenn ouzhoc'h, o mamm vat,  
Pep unan anê, e vennad.

*Et ensuite les chrétiens de Maël  
Venaient prier à votre chapelle  
Pour vous présenter, ô bonne Mère,  
La demande de chacun d'eux.*

3 - Met graet a voe brezel spontus  
D'ar gristenien, d'o mestr Jezuz ;  
Ho chapel neuze a gouezhas  
Ne chom hirie nemet he flas.

*Mais une guerre épouvantable fut faite  
Aux chrétiens, à leur maître Jésus ;  
Votre chapelle alors tomba :  
Il n'en reste plus que l'emplacement.*

4 - Bremañ 'fell dimp, Gwerchez Vari,  
'Vel hon tadoù dont d'ho pediñ ;  
Roit dimp sikour ha sklerijenn  
'Vit bout 'velte gwir gristenien.

*Maintenant nous voulons, Vierge Marie,  
Venir vous prier comme nos pères ;  
Donnez-nous aide et lumière  
Pour être comme eux de vrais chrétiens.*

5 - Kemerit truez, o Gwerc'hez dous,  
Ouzh holl re vihan ar barrez ;  
O diwallit ouzh ar c'hleñved  
Hag ivez ouzh an drouk-spered.

**Refrain :**

**Notre-Dame de Kerléan,  
Soutenez-nous jusqu'à la fin ;  
À vos enfants donnez votre bénédiction  
Que nous puissions aller au Paradis.**

*Prenez pitié, ô Vierge douce,  
De tous les petits de la paroisse ;  
Gardez-les de la maladie  
Et aussi du démon.*

6 - Dister eo kan ar c'hrouadur  
Met e galonig a zo pur ;  
O Gwerc'hez vat eus an Neñvoù  
Sikourit hon bugaligoù.

*Le chant de l'enfant est humble  
Mais son petit cœur est pur ;  
Ô bonne Vierge du Ciel  
Aidez nos petits enfants.*

7 - Gwerc'hez Gerlean, roit sklerijenn  
D'an tadoù, d'ar mammoù kristen  
Evit ma savint o bugale  
'Vel 'peus savet ho Mab Doue.

*Vierge de Kerléan, donnez la lumière  
Aux pères, aux mères chrétiennes,  
Afin qu'ils élèvent leurs enfants  
Comme vous avez élevé votre Fils de Dieu.*

8 - Bezit skoazell al labourer,  
Sikourit ar vamm 'barzh ar gêr,  
Hon sikourit eus lein ho kloar  
'Hed hon beaj war an douar.

*Soyez le soutien du paysan,  
Aidez la mère chez elle,  
Aidez-nous du sommet de votre gloire  
Au long de notre voyage sur la terre.*

9 - Gras dimp da chom start en hon feiz  
Ha start e karantez Doue ;  
Nac'h ar gwir feiz, hon feiz santel,  
Kentoc'h mervel, kentoc'h mervel.

*Que nous ayons la grâce de rester forts dans notre foi  
Et forts dans l'amour de Dieu ;  
Renier notre vraie foi, notre foi sainte,  
Plutôt mourir, plutôt mourir.*

10 - Itron Varia, Gwerc'hez santel,  
Sikourit, ni ho ped, tud Vael ;  
Deuit en o zi, eno an nor  
'Vel ar galon a zo digor.

*Notre Dame, Vierge sainte,  
Aidez, nous vous en prions, les gens de Maël ;  
Venez chez eux, où la porte  
Comme le cœur est ouverte.*

11 - O Itron Gerlean, ni ho ped  
Ho pezit truez ouzh ar bed ;  
Roit sklerijenn d'an dud dall,  
Chadennit startoc'h an diaoul fall.

*Ô Notre Dame de Kerléan, nous vous en prions,  
Ayez pitié du monde ;  
Éclairiez les aveugles,  
Enchaînez plus fermement le diable mauvais.*